

Elen ar viskoulenn
hag e amezien
klas MS-GS skol KERMARIA
Fanny Jézéquel



Elen ar
viskoulenn
hag he
amezeien

Fin ar goañv zo o tont, echu gant an erc'h hag ar yenijenn. Skinoù kentañ an heol zo o tommañ douar al liorzh. War un delienn emañ ur vi lufrus, skin an heol warnañ ha POP dont a ra ur viskoulenn bihan er maez eus ar vi-se

- O pegen brav eo ar jardin, emezi o sellet tro dro dezhi. Met petra wellan, tud a zo du-se, va amezeien eo !
HA ma zafen da gejañ outo ?

Ha setu ar viskoulenn o tiskenn eus he delienn hag o vont da bourmen.




Goude bezañ baleet e erru ar viskoulenn dirak ur pour bras, glas ha gwenn.

- Piv out te ? eme ar viskoulenn vihan. Ha petra rez amañ ?
- *Hello*¹, me zo *Leek* ar pour. Ul legumaj on, debret e vez ac'hanon 'barzh soubenn, pe tartezennoù. Ha da amezeg on, rak va liorzh eo ivez ! Ha te petra eo da anv ?
- Va anv zo Elen ar viskoulenn, eme ar viskoulenn. Me zo o paouez erruout ha kollet on un tamm, rak ne anavezan den ebet.
- *Come with me*², eme *Leek* ar pour ha deomp da welet va vignonez Juju ar c'harotezenn.

¹ Demat e Saozneg

² Deus ganin e saozneg



Setu Leek hag Elen o vont da wellet Juju ar c'harotezenn.

- Piv out te ? eme ar viskoulenn vihan. Ha petra rez amañ ?
- Bonjour, je suis Juju. Me zo Juju ar c'harotezenn. Ul legumaj gwrizienn on, debret e vez ac'hanon gant lipig pe evel yod, ur blaz dous a zo ganin. Ha te petra eo da anv ?
- Va anv zo Elen ar viskoulenn, eme ar viskoulenn. Me zo o paouez erruout ha kollet on un tamm, rak ne anavezan den ebet.
- Suis-moi, deus ganin eme Juju ar c'harotezenn, deomp da welet va vignonez Pomodoro an tomatezenn.



Setu Elen, Leek ha Juju o vont da wellet Pomodoro an tomatezenn.

- Piv out te ? eme ar viskoulenn vihan. Ha petra rez amañ ?
- *Ciao*³! Me zo *Pomodoro* an tomatezenn, debret vez ac'hanon pad an hañv. Lod a lavar hon ur frouezh lod all ul legumaj. Ha te petra eo da anv ?
- Me zo Elen ar viskoulenn, eme ar viskoulenn. Anavezout a rez ar vaouez mouk du-se ? Seblant a ra bezañ gentil, mont a rafemp da welet anezhi ?
- Gentil eo marteze, eme Pomodoro an tomatezenn, met n'eo ket va vignonez, chikant a zo etrezomp abaoe pell, deomp da welet Glou-glou ar penn ognon kentoc'h, va mignon eo eñ !

³ Demat e Italianeg



Setu Elen, Leek, Juju ha Pomodoro o vont da wellet Glou-glou ar penn ognon.

- *Ciao Glou-glou* eme Pomodoro an domatezenn, setu Elen ar viskoulenn o veajiñ er jardin.
Dont a ra da gejañ ouzh e amezeien, nevez erruet eo hi.
- *Guten Tag* ⁴Elen, ich bin ⁵Glou-glou, me zo Glou-glou ar penn ognon.
- Da betra servijez ? eme ar viskoulenn.
- Kavet e vez ac'hanon un tamm e pep lec'h, e kegin ar-su pe an norzh, diwan a ran e pep lec'h pe dost. Ur blaz dous a zo ganin pa vezañ poazet me taol evez d'az daoulagad pa vezañ kriz !
- Chikan a zo ivez etrezout hag ar vaouez e mouk du-se ? Evel gant Pomodoro ? a c'houlenn Elen.
- Ket ! Ur vignonez din eo, sevel a ran brav en e-kichen ! Mont a rafemp da welet anezhi, ma fell dit ?
- Oh ya marplij ! Deomp da welet anezhi, eme Elen.
- *Rimango què* ⁶, chom a ran amañ a lavar Pomodoro. Ken ur wech all ! *Arrivederci* ⁷!

⁴ Demat e Alamaneg

⁵ Va anv zo Glou-glou e Alamaneg

⁶ Chom a ran amañ e Italianeg

⁷ Kenavo e Italianeg



Setu Elen, Leek, Juju ha Glou-glou ar penn ognon o vont da wellet Koko ar betarabez.

- Piv out te ? eme ar viskoulenn vihan. Ha petra rez amañ ?
- Me zo Koko ar betarabez, evel ar c'harotezenn, on ur gwrizienn, bevañ a ran dindan an douar. Ha te piv out ?
- Va anv zo Elen ar viskoulenn, ha nevez on er jardin.
- Gortoz amañ neuze, gervel a ran ur mignon all : Titi ar fav glas.



Ha setu e erruas Titi ar fav glas, ul legumaj hirr ha glas.

- Titi eo ma anv, eme ar fav glas, ha mignon on gant Koko ar betarabez.
- Brav ar buhez ganit biskoulenn ?
- Oh ya kejañ a ran ouzh va amezeien, emezi. Kejet m'eus gant an holl legumaj !
- Chom a ra dit neuze da gejañ ouzh Pompon ar sivi, deus !



Setu en holl legumaj hag Elen o vont daveet Pompon ar sivi.


- Salud, eme Titi ar fav glas. Setu Elen ar viskoulenn, an amezegez nevez !
- Mat an traou ? degemer mat en hon liorzh brav !
- Trugarez a respontas Elen, pegen plijus eo kejañ gant holl an amezeien !



- Mank a ra Pomodoro a lavaras Elen, Pomodoro, Pomodoro, deus !

Setu Pomodoro o tont.

- N'out ket rediet mont e kichen ... ar betarabez ma ne fell ket dit, met gellout a reomp c'hoari holl asambles memestra, ne soñj ket deoc'h a c'houlenn Elen ?
- Geo, geo a respont a re all.
- C'hoariomp asambles ha savomp ur pezh mell saladenn a ginnigas Leek ar pour.



Ha setu an holl da c'hoarziñ ha da c'hoari asambles.

- Mat eo bezañ amezeg, gwelloc'h c'hoazh eo bezañ mignoned !

